

18.

D'ar vugalgou vihan roit ho pennoz ive,
Digassit d'ez ho furnez ha karantez Doue,
Grit d'eo ober jousted hag ho mamm hag ho zad,
O veza dous ha sentuz ha mad da labourat.

19.

Da zant Tugen, meuleudi hag anaoudegez vad,
Gant hon Tad trugarezuz, ni vezo paet mad,
Arok kuitaat he chapel hirio ni lavaro
« Kenavo ar bloaz a zeu, sant Tugen, kenavo ! »

20.

Pa zeñi hon heur diveza, ni bed ho madelez,
Da obteni deomp beza plaset gant ann Elez,
Gant ar Zent hag ann Elez e Barados Doue,
Tost d'oc'h, Otrou sant Tugen, hed ann eternite !

N. B.




Imprimatur :

Quimper, le 18 Mai 1894.

F. CORRIGOU, Vic. gen.

Kemper, Moullerez ru'an Dudéhentil, 7.



KANTIK

DA ZANT TUGEN

Ton *Kelven* pe ton *Breudeur*, ni glev ho klemmou.

1.

Etre parrez Eskibien ha parrez Primelen,
Dem-dost da barrez Goulien ha da barrez Kleden,
Zo savet eur chapel gaer, hag eunn tour braz meurbel,
Eun enor da zant Tugen, sant Tugen benniget !

DISKAN :

Henor, gloar ha meuleudi, doujans ha karante
D'hon Tad-Abad, evuruz, kurunet gant Doue,
Henor, gloar ha meuleudi d'ann Aotrou sant Tugen,
D'hor Patroun karantezuz, meuleudi da viken !

2.

Iliz Sant-Tugen savet gant hon tud-koz guêch-all,
A laka ar c'halounou gant ar joa da dridal,
Ar vein-dailh zo kizellet hag holl dantelezet,
Ann tour karre ha ledan a zo kaer da velet !

3.

Patromou ann Ebestel, ann Avielerien
A velet dudiuz-braz e chapel Sant-Tugen,
Kempennet ha kizellet, labourer brao-meurhed,
Renket endro d'ann iliz, hag endro d'ar porched !

4.

Koant eo patroum sant Tugen, var he benn zo eunn tok,
Enn he zorn-deou eunn alc'houe gant eur vaz a Eskop,
Harz he dreid eur pardouner, o pedi daoulinet
A zo bet, dre eur burzud, diouz eur c'hi diouallet !

5.

Kaer eo guelef er chapel endro d'ann aoter-vraz,
Aoter splam hag alaouret, Itron-Varia-C'hraz,
Aoterik santez Barba, aoter ar Rozera,
Gant skeuden sant Dominik ha santez Thereza

6.

Brudet ha darempredet eo chapel Sant-Tugen
A-leiz a belefinet zeu di gant goulaouen,
A zeu di da bardouna gant feiz ha karantez
Ha da bedi a galoun sant Tugen ann Alc'houez

7.

Guelef a rer d'ar pardon gouriz koar ha goulou,
Benniga a rer er chapel niver braz a alc'houeou,
Douget gant devotion, ann alc'houeou bihan,
Ho denz galloud da zifen diouz binim ar chas klan !

8.

Da zeiz pardon Sant-Tugen, kalz a belefinet,
Gant ar chapeled enn dorn pe goulou benniget,
A ra teir zro d'ar japel, o vale diarc'henn
Enn eur bedi kalounek ann Otrou sant Tugen !

9.

D'ar zul araok gouel Sant-Iann da genver miz Even,
A rer, bep bloaz, ar pardon e chapel Sant-Tugen,
Deut eta, poblou kristen, niveruz, d'ar pardon,
Gant kroaziu, gant banniellou, hag e prosession !

10.

Var bouez ober er chapel eur communion vad,
Pedi evit an Iliz, Hon Tad Santel ar Pab,
E c'hounezet d'ar pardon ann induljansou braz,
Dre veritou Hor Zalver, zo maro var ar groaz !

11.

Ar chapel zo bet savet e kichen ar mor glaz,
Enn enor da zant Tugen a ra burzudou braz,
Burzudou var ann douar, burzudou var ar mor
E-kenver tud ann Argoat ha bugale Arvor

12.

Ia, braz eo ar burzudou a zo bet c'hoarvezet
E-kenver tud ha loened enn amzer dremenet,
Galloud Aotrou sant Tugen zo ker braz a gueb-all
Goulenomp hag hor bezo, hirio, burzudou all

13.

Salud ! Aotrou sant Tugen ! salud ! o tad santel !
Sellit ouz ho pugale diredet d'ho chapel,
Sellit ouz hon ezommou, klevit hor pedennou,
Sellit ouzomp gant truez, roit deomp hor goufennou

14.

Difennit ar Vretoued, Bretoued Breiz-Izel,
Deut aman da bardouna euz a dost hag a bell,
Kreskit enn'ho ar guir feiz, ar guir relijion,
Ha roit dez-ho evidoc'h, eur guir devotion !

15.

Difennit al labourer, sant Tugen benniget,
Euz pep drouk euz pep anken nen diouallit bepred
Difennit tud ha loened diouz ar chas kontammet,
Hag enebou ho pugale, miret diouz ar pec'hed !

16.

Diouallit ar martolod pa vo var ar mor braz,
Beillit var he vatimant pa dremeno ar Raz,
Beillit var ar pesketour, var lie vagik dister,
Goude peskerezh founnuz ho digassit d'ar guer !

17.

Roit ho pennoz, d'ann Iliz, bennoz ive d'ar Frans !
Da anaon ar purkator goulennit dilivrans,
Goulennit d'ann den dallet ar c'hras a sclerijenn,
Ha d'ar pec'her kaledet ar c'hras a binijenn.